

CANTIC

AR BUGUEL PRODIG.

*Pehini a zo meurbet profitabl da zisquez d'an
dud yaouanq da zioüal diouz ar guin ha
diouz ar merc'het.*

Var ton ar Falz Pinvidic.

ENTENTIT oll Bretonet, hac e cléfot cana,
Buez ar Buguel Prodig, mar gallàn discléria :
Plijadur ho pezo sur, mar qirit ententi,
Ha profitabl eo ive ous tad ha mam senti.

Cetu amàn en antier buez ar Mab Prodig,
A voa en e liberte abaoe yaouanqic;
E dad, e vam en leze da c'hoari ha tripal :
Diouz goal compagnunezou e tle peb den dioüal.

Calz a dud so er bed-màn la ne sourciant qet
Pe a lec'h e teu madou, pa n'o gonezont qet,
Evit o drouc implija ne reont câz a ze :
Nep o deus-e gonezet o deus bet poan gante.

Tad ha mam me ho suppli, ha mestr ha mestrezet,
 Corrijit an dud yaouanq, ha dalc'hit-e sujet;
 Difennit oute ar guin, an c'hartou, an dansou :
 Cassit-e d'an Oferen ha d'ar C'hatekismou.

Clêvit oll, tud pinvidic, pa oc'h eus ar voyen,
 Corrijit ho pugale hac ho servicherrien;
 Na roit qet liberte en yaouanqis dê re :
 Disqit dêze oll abret da servicha Doue.

Grit dêze monet bemde da glêvet oferen,
 A bella dious an den pep seurt goal blandeden;
 Enni ez eus un tenzor hac a so caer meurbet,
 Representi Passion hor Zalver beniguet.

Emàn voa un den yaouanq ha na rê cas ebet
 Pe a lec'h e teu madou, pa n'o goneze qet :
 Qer prompt evel ar grizill pe ar gliz e mis mae
 Vize an arc'hant gantàn, cher vad, c'hoari a rê.

Ur spaç a amzer e voe e ti e dad maguet,
 Madou bras a zispigne, ha na rê câs ebet,
 Gant ar c'hartou, an dansou, ar guin hac ar merc'het
 O tispign en un devez tostic da zaou c'hant scoet.

Ne voa nemet pemzec vla pa c'houlennas genta
 E bartach diouz e dad, ma carje e rêi dezâ;
 Mes e dad a estime, pa vije deut en oad,
 E teuje dezàn sqiant pelloc'h da evessât.

E dad hac e vam bemde a bede evitâ
 Jesus hac e vam Mari da rêi ar c'hraç dezâ

Da veza' un den honest, evel ma oant-y bet;
 Evit qement m'er pedent, oute ne zente qet.

Un devez e lavaras sur d'e vam ha d'e dad,
 Me renq hirio caout arc'hant evit ober cher vat;
 Me a zo un den yaouanq eus a gondition,
 Hac a renq ober cher vad gant an dud a fêçon.

Pa voa pemp bloas varnuguent, e lavaras d'e dad :
 Me a ranq caout va fartach bremâ en ur yalc'hat ;
 Me a yêlo da vale evit guelet ar vro ,
 Ha ma cavân va fortun un tu, m'e c'hemero.

E dad a respont dezâ gant carante bêpret :
 Me ro va bennos deoc'h gant carante barfet ;
 Ho pezit sonch a Jesus, ne ancounait qet
 Ar c'homzou en deus ho tad alies lavaret.

Neuze e roas e dad dezân trêgont mil scoet
 En aour fin hac en arc'hant en ur yalc'hat contet :
 Cetu aze ho partach, pa fell dêc'ht hor c'huitât :
 Doue roî deoc'h e c'hraç d'ober ur veach vat.

Qenta repas a eure ar Prodig obstinet
 Voa en un hostaliri gant ur vanden merc'het,
 Servichet mad voe certen en deis-se da goania,
 Sonerien evit dansal, plac'h coant da servicha.

Pa vise'r gompagnunez ous an daol azeet,
 E voa en e blijadur ha gantân ar merc'het ;
 Qeit ha ma pade arc'hant, cher vat a rent gantân,
 Plijadur bras a gavent ober goab anezân.

P'oa dispignet e arc'hant, e vije trist meurbet,
 E lar d'e gompagnunez n'en deus liard ebet;
 Mes ractal e hostises dezàn en deus respontet :
 M'o tivisco, compagnun, ma na ven-me pêet.

Pa voa goastet e arc'hant, ne voa netra chomet,
 E falle dezàn c'hoari, ober cher vad bepret;
 Mes a doliou qeuneuden e voe prest qempennet,
 Tennet e vleo ous e ben ha qerqent divisqet.

Goude ma voe chassset eus an hostaliri,
 N'en devoa qet a zillat, nac a voed da zebri;
 Un drue voa e glêvet o crial en hentchou,
 Gant riou ha naon en devoa goude e oll cheriou.

Neuze e tistroas c'hoas d'ar guêr da dy e dad,
 Evit goulen da loja evel un tremeniat :
 En han' Doue, emezàn, m'ho ped hac ho supli
 Da loja un tremeniat so scuis ha na ell mui.

Pa voa lojet gant e dad, n'en anavee qet,
 En a ouye an doare, mes n'en disqueze qet,
 Pa voant ét oll da gousqet, én a gassas ganta
 Vesseliou aour hac arc'hant demeus ar re gaëra.

Neuse en em gavas prest gant he hostaliri,
 Hac en devoa evite da eva, da dibri;
 Qeit ha ma padjont outàn bepret e rê cher vat,
 Mes ne badas qet pell bras ar vech-se ar yalc'hat.

Neuze e voe tracasset, injuriet gante,
 Evel eur forban basnet voa da velet neuze;

Hac o tonet da zonjal e voa ur pec'her bras,
Pa voe bolonte Doue en em gonvertissas.

Pa zonjas en e vuez, e sellas ous an êe,
O sellet pebes fortun bepret a rancontre;
Monet a eure neuze, goude e voal vue,
Da evessa al loened o tistrei ous Doue.

Monet a eure neuze d'un ty da servicha,
Ma vijè o bolontez da rei souten deza.
Me chomo da labourat en arat, mar qeret,
Pe autranant me a yêl da viret al loenet.

Neuze e laras dezàn ar merer ac'hane :
N'anduràn qet an dud scàn a ve het o vale;
Me meus tud da labourat qement hac a so ret,
Nemet da viret ar moc'h mar qeret e chomet.

En han' Doue, emezàn, va mestr, me ho supli,
Me rai vel ma lavaret : va mirit en ho ty;
Mar gallàn ho servicha èvel ma leveret,
Qeit ha ma plijo ganêc'h evit caout un tam boed.

Neuze e zeas ar Prodic da vessa ar moc'h-se,
O tont da gonsideri guechal en e vue,
En devoa grêt cheriou mat, ha drouc distribuet,
Ha bremâ en paourente n'en devoa esqen boed.

Un druez voa e glêvet en noas beo o crial,
Gant paourentez ha fatic goude e reus fall;
Gant naon e voe surprenet qen a rancas dibri
En ul laouer gant ar moc'h a bep seurt vileni.

Guell ve da un den certen beza nao de var yun
 Eguet ober re gorfat, na beza disasun,
 Coll a ra e zantimant neuze gant re gorfat,
 Ha m'ar caret e lezel, e raî un drouc benac.

Beza escus debochet ha drouc implich madou,
 Ar merc'het fall hac ar guin so cos da valeuriou,
 Ha goude ar foll dispign e zeont d'en em ganna;
 Cetu siouas maleuriou goude drouc implija.

Peguen lies a den sur a so var ar bed-màn,
 A so bet pinvidic bras, allas! zo paour bremàn!
 Goude prodigalite, eva guin ha c'hoari,
 E vezo trist ar Prodig, ma na ve da zibri.

Goude e foll despignou, cetu en distroet
 Da veza den gracios, humbl meurbet ha parfet;
 Pa voa bolonte Doue en em gonvertissas,
 Hac e tenas ar vech-se d'ar guer morc'hedus bras.

Goude-se en em rentas e qichennic e dad,
 Hac e teuas da sonjal gant ur volonte vat:
 Autrou Doue, emezàn, ha m'em be hardisson
 Da vonet dirac va zad, ha me gen dirêson?

Me a ya en han' Doue, emezàn, da antren:
 Deis mat déc'h, c'houi a bedàn, cetu ho courc'hemen,
 Cetu ho mab hirvoudus: lavaret mad ho poa
 E vizen e paourentez, ma ne garjen poania.

Va mab, me a so joaus d'ho peza distroet,
 Meulet bremàn a galon ar Verc'les benignet;

Me am boa digant Doue pell a zo desiret,
Evit clêvet ho toare, pelcc'h e vijec'h êt.

Me so ar maleürussa a voe biscoas er bed :
En hano Jesus ha Mari, va zad, va fardonet :
Me meus goal distribuet ar pezh ho poa roet
Din da ober va frofit, ma carien o miret.

E dad a laras neuze d'e oll servicherien :
Ret eo laza un oan læz, un oc'h hac un eugen ;
Da ober ur banquet caer d'am mab so distroet ;
Ret eo dont, va zud qeaz, varc'hoas d'e velet.

Calz a dud so er bed a evel ar Mab Prodig,
Hac a so anval ive ous ar Fals Pinvidic ;
Er bed-màn eo e gevont ama o baradoes,
N'o deveus sonch a Jesus nac e vam ar Verc'hes.

Me ho supli, tud yaouanq a bep sort qalite,
Tud a bep condition, hac ar re goz ive,
Dious goal compagnenez da divoal bepret
Ar c'hoari, an nosveziou, ar guin hac ar merc'het.

Ar re-se, siouas ; a so da gals occasion
Da ober calz maleuriou hac o daonation :
Caledet int nos ha deiz ebars en o fec'het,
Fê eo gant calz o c'helen en hent da veza salvet.

Ma caremp consideri en Mari-Madalen,
So en em gonvertisset gant ur sermon hepquen,
Ni ne reomp cas, siouas, evit clêvet bemde
Sermonion, buez ar Zent, hac exemplou ive.

Allas! nac a oferen bret, na sermoniou ive,
 Ne gar qet tud obstinet n'o deus doujanç Doue,
 Na Catekismou da Sul, ive d'ar Gouelyou din,
 Setu, siouas, an enchou a gundu d'ar goal fin.

Diou consideration a rencomp da gavet
 Evit miret ous an den ne ve qet condaonet :
 Ar c'henta caret Doue dreist madou ar bed-màn;
 D'an eil, aon rac an ifern, a so carguet a boan.

En han' Doue, Christenien, greomp oll orêson
 D'ar Verc'hes sacr, Mam Jesus, bemdez a vir galon,
 D'hon Æl-mat ha Gardien, d'ar Zent ha d'hor Paeron,
 Zo hon guir Advocadet dirac Roue an Tron.

Clêvet oc'h eus an histoar, ha mar qeret miret
 Dious prodigalite dont da divoal bepret;
 Goulennomp digant Jesus hac ar Verc'hes divin.
 Ar c'hraç da vont d'e veuli er Barados er fin.

FIN.

E Montroulez, e ti LÉDAN, e traon ru ar Vur.